

*Ar Vretoned  
15 Genver 1906.*

## BLAVEZ MAD !

25

Me gred, va mignon ker,  
E kav̄o va lizer,  
Daoust ma 'z eo kalz re verr,  
Ar gwella digemer.

Evidoc'h, em feden,  
Va c'halon a c'houlen  
Eur bloaz santel, laouen,  
Didrabañ, dianken.

Amzer an arne braz  
Zo digouezet, siouaz !  
Den ebet ne oar c'hoaz  
Petric vezo varc'hoaz.

Gant eur fizianz nerzuz  
Lavaromp da Jezuz :  
« Hor stad zo truezuz ;  
» *Salva nos, perimus !* »

Evel an Ebrestel,  
Mariteze 'vo ket pell  
Ni welo an avel  
Hag ar mor o tevel.

N'euz forz petra vezo,  
Dalc'homp, dalc'homp ato,  
Tre beteg ar maro,  
**Da garet Breiz, hor bro.**

*Eur Missioner breizad.*